




# CHANSON

VAR SUJET

## AN HOSTIS LIPER.



Var tòn : *Ar Filouter fin.*

Me o ped, entrezoc'h, bretonet tostaet aman,  
 A me a reyo va oll bôsupl evit recitan  
 Ar farç plaisant zo ariet, exempl eo er vrô,  
 Arriet er blavez presant er barouç Kenavô.

Goud a red pep hini ac'hanoc'h n'eo ket permetet,  
 Denommi anoyou an dud en chanson a bet,  
 Me o lez da sonjal da biou ez eo composit:  
 An hini a sant caout gál ell e n'eum grafnet.

Me a goms demeus eun hostis a gare lipet  
 En kement scôden ve 'ne dy e vèg ve fouret,  
 Goud a ouïe conta d'an dud flibes a flabes,  
 Evel-se dapé bannac'hou en he blijadures.

Pa nijè servichet an dud er sall da eva,  
 En a lere eur fars bennác d'ho divertissa,  
 Ar bambocher a voe contant eus a guement-se,  
 Hac a lavar d'an hostis : « Azeïd da eva eur banne. »

An hostis e voa eur liper, 'vel ma m'eus laret,  
 Hac azea gantê ous taol, se voa e souhet,  
 Presanti a ra e voerèn deze hep dale:  
 « D'ho yec'het, ma zud, emezan, evomp eur banne. »

Kement boutaillad a deu ractal ve peet,  
An hostis a dastum arc'hant hag a ev bopret,  
Eur vicher demeus ar brava, se a zo plesant,  
Eva guin demeus e gao hac ouspen touch arc'hant.

Ar reman voa tri dèn yaouank, mibien d'eus a dy,  
Voa ed d'en eun divertissa d'an osteliri,  
Keit a ma pad o arc'hant e zint bet servichet,  
Betec nav heur eus an nòs o yalc'h a zo padet.

Pa voa dispignet o arc'hant o d'eus lavaret  
D'an hostis rei deze en credit c'hoas eur voutaillet,  
An hostis a lavar dèze : « Poënt eo finissa,  
» Avancet eo an nòs, it d'ar gueur da loja. »

Unan eus an tri dèn yaouank a n'eus lavaret :  
« Petra, emezàn, ma hostis, leret a sonjet,  
» Aboue eiz heur d'eus ar mintin c'hui a zo regalet ;  
» M'ar d'oc'h dèn brao peet breman d'imp eur voutaillet. »

Ractal m'o d'eus laret d'an hostis pea boutailled  
En eur goler d'eus ar vrassa é a zo antreet :  
« It emes ma zy, e mean, partiet ractall,  
» Rac me na n'oun ket decidet da rei deoc'hu regall. »

An eil a lere d'eguile pa voaint ed er meas :  
« Bemde voar o tiski skiant, camaradet keas,  
» Goude beza græt honestis a cals dispignet,  
» Pa eo bet lipet hon arc'hant er meas z'oum taolet. »

Unan eus an tri dèn yaouank a n'eus c'hoas lavaret :  
« Tapet brao omp gant an hostis evel a velet,  
» Me a bromet d'oc'h, var va guir, ha m'en lavar scler,  
» Me a zizono an hostis da veza liper.

» Me ho ped, va c'hamaradet, dissul ar beure,  
» Da zonnet da dy al liper da eva eur banne,  
» A prest goude me arruo en eur gariolen  
» Dre ma na c'houlennàn ket beza anavezet gant dèn. »

E daou gamarad a n'eum gav d'ar sul ar beure  
Hac int o laret d'ar liper : « Roit d'imp eur banne!  
» Ni a beo d'oc'h en avanç, aman ho poesson,  
» Hac evit ganimp eur bannac'h, canet d'imp eur sôn. »

An hostis a voa guel gontant a rejouisset  
Pa n'eus guelet e voa kelo adarre da lipet,  
Mes ma nije bet gouveet voa vit e domach  
E nije bet o servichet a leset e lipach.

Chetu ari hor c'hamarad en eur gariolen  
Hep beza bet enep fêçon anavezet gant dén,  
Disken a ra en ty al liper, lojeiz a c'houlén;  
« Leket, e mean, 'no remis va c'hariolen.

» Leket va marc'h er marchossi a roit dezan bouet,  
» A bezit bopret dizourci, pèed sur a vefet,  
» Kerc'het eus ma c'hariolen din ma valijen  
» Ma roin arc'hant dèc'h da gleinka en presañc daou dén.

» Dre ne allàn ket partial d'eus ac'han fete,  
» C'hui a zastumo va arc'hant d'in en sûrete,  
» Contet an è er fad, hostis, daou c'hant scouët a zo,  
» Ha pa mezo ezom, ganec'h me a c'houlénno. »

An hostis a gont an arc'hant, « Ya, emezàn,  
» Daou c'hant scouët a zo aneze, evel a velàn,  
» Aoutrou, me o ped, da veza dizourci a se,  
» Me o lakeio 'bars em pres dèc'h en sûrete. »

An hini voa sancet aoutrou a n'eus lavaret :  
« Kerc'het din eur bannac'h, me a m'eus sec'het,  
» Goude c'hui a gleinko va arc'hant en ho contouër,  
» Ne mo ket ezom aneze ken a vo ember. »

An hostis a voa eur liper, an oll voar er vrò,  
Mes a hent-all e voa honnest en he oll goncho,  
A nevoa ket disfiang eus a zèn a bet  
Se ra dezàn er moment-se beza bet tapet.

Keit a ma voa ed an hostis d'ar c'hao da vit guin  
An aoutrou n'eus bet amzer da ober e dro fin,  
An daou c'hant scouët en d'eus boutet en e c'hodellou  
A laket 'bars er valijen mein en ho flassou.

Pa arruas an hostis gant ar guin er sall,  
An aoutrou a bed anezàn da vonet ractall,  
Da gass e valijen d'e bres a return goude  
Vit m'o deffont ar blijadur da eva eur banne.

Pa n'eus alc'houezet var ar valijen  
D'ar sall zeo retornet, joaüs 'vel peb dèn,  
An aoutrou a lavar dezan : « Evomp eur banne,  
» Ha canit d'emp eur ganouën var eun ton neve. »

E daou gamarad a lavar : « Poënt eo finissa  
» Rac varc'hoas ar beure, aoutrou, ni a deuyo ama ;  
» Varc'hoas ni guemero amzer d'en em explika  
» Var ar pezon d'eus lavaret amàn er beure ma. »

An deiz varlerc'h, d'eus ar beure, c'hari an daou dèn,  
Ma c'houlenjont gant an hostis hac e voa moyen  
Da goms gant an aoutrou pehini voa 'ne dy lojet :  
« Leret dezan c'homp ari a ni goël bresset. »

An hostis a lavar d'an aoutrou : « Daou dèn zo amàn  
» Hac a ziscouez beza presset, ervez a velan ;  
» An daou dèa a voa amàn ganec'h dec'h, aoutrou,  
» A n'eus c'hoant da barlant ouzoc'h evit afferiou. »

Pa arruas an aoutrou er sall e voe saludet :  
« Bonjour, emeze, deoc'h aoutrou, a c'houi yac'h bopret. »  
» Brao bras ouñ, eme an aoutrou, yac'h, evel peb hini,  
» Digassit d'imp breman, hostis, friko d'hon dijuni. »

An hostis a zigas deze a kiq a bara  
Hag ive boisson da eva, na vanke ket netra,  
An aoutrou a lar d'an hostis : « It breman 'no tro  
A lest ac'hanomp aman sioul 'vit hon affero. »

Eun anter-heur vad d'ar goude ho deveus scoët,  
An hostis a c'houl digante : « Petra souetet ? »  
An aoutrou a lavar dezan : « Digassit brema  
» Ma valijen dîn ma mezo arc'hant d'ho peâ. »

An hostis a redas d'he bress, ya hep dale,  
Digas 'ra gantan ar valijen hac è bopret guè ;  
An aoutrou a lavar dezan : « Contit, me ho ped,  
» Goud a ouzoc'h voa aneze en Franc daou c'hant scoët. »

Pa n'eus digoret an hostis ar valijen ma  
Na gavas 'bars en enni nemet mein da gonta,  
Ma n'eum gav ên bras estonet, a ma lâr d'an aoutro :  
« Unan benac a renk bea c'hoariet dîn an dro. »

An aoutrou a c'ha en coler, dezan a lavar :

- » Te , mean , a zo eur filout , hac unan eb e bar ,
- » Mad a voa din cavet testou ( me d'ha vèl ous ar groug ) ,
- » Penevert-se voën tremenet ganet 'vit eur filout. »

An aoutrou a savas he vouëz hac a lavar dezan :

- » Te , mean , zo eur fripon , eul laër , var a velan ,
- » Me a ya da gavet ar Juj 'vit ma vi punisset ,
- » An dud man voar ma roët dide daou c'hant scouët. »

An hostis a lavar d'an aoutrou : « Me o ped

- » Na decriet ket ma zy , me a zo tapet ,
- » Eur veac'h-all me vo furoc'h , din eo eun exempl ,
- » Na destumin ken 'bars em press mein en plaç arc'hant.

- » Roët o poa din da gleinka dec'h o taou c'hant scoët ,
- » Me m'oa ho c'hontet ma hunan , hac em pres alc'hoët ;
- » Me rento dec'h o taou c'hant scouët , netra justoc'h vit-se ,
- » Ar c'holl a viran evidon , teomp-oll gant-se. »

Ar chanson-man zo eun exempl d'an oll en antier ,  
Ken couls eo evit an hostis 'vel vit ar bambocher ;  
Ar bambocher pa n'eus arc'hant a ve servichet  
Ha pa ve sec'h e c'hodell er mez a ve taolet.

D'an hostichen e zeo exempl couls a da reall  
Rac aliez e ve affer gant tud meurbet fall ,  
Emàn zo bet tapet , se a zo plesant ,  
Kemer mein gant eur filout 'bars en plaç arc'hant.

Composet gant RENE AR BARS , guinidic a Landreguer.





# SÒN eun DÈN yaouank

A ZO BET TRAHISSET

**GANT HE VRASSA MIGNON.**

---

Var tòn : *Me m'eus choazet eur Vestres.*

Ha breman pa mon dichif gant peubeut a studi  
Me ia da zével eur zòn herves ma fantazi ;  
Mes kent mont pelloc'h arog , me ho ped , Bretonet ,  
Ne rit ket din scouarn vouzar , gant-se ma chelaouet.

Me zo c'hoaz eun dèn yaouank , greder ket d'am c'homsou ,  
Gouscoude gant ma c'hompaz ouzon tenna planiou ;  
Eun ali m'eus da rei d'oc'h , oll dud yaouank curius ,  
Tec'het pell , mar em c'hredet , d'eus daou hent danjerus.

Ar c'hetan gontan zo hent ar mabik Cupidon ,  
Pehini dre gomzou caër n'eus tizet ma c'halon ,  
Rag ma m'eus choazet da vestres eur plac'h d'am fantazi ,  
Roan fors petra vo laret , ne garan nemert-hi.

Kenta m'eus bet ann enor hag ar chanz d'he guelet ,  
Oa ann dri zul a viz east , var dachen ar Sklerdet ;  
He daou lagad a verve , he c'horf oa moan ha coant ,  
Ne gredan ket ma he far 'bars ann departamant.

Hi doa laret din traou caër , ia , eno da gomanz ,  
'Vit ma lakat da veva , ia oar ann esperanc :  
— « Assa , eta , dén yaouank , poent eo d'imp kimiada ,  
Rac tostaat a ra d'ann noz , hag ann heol izella. »

— « Kenavo 'ta , ma mestres , ha dalc'het d'ho komsou ;  
» Doue ar Mestr , mar plij gantan , vimp dimezet hon daou  
» Mes 'vit beza dispartiet , kredit mad ne vimp ket ;  
» Piou virfe vimp eureujet met teodou milliguet.

» Rabad eo d'imp kaout hanao barz hon tud na barz dén ,  
» Met hon lezel enn hor c'hoant pa na c'houlennomp ken ;  
» Ma teufemp 'benn da veva a drugare Doue ,  
» Ni zo zur da vout euruz hed ann eternite. »

N'eus netra 'bet joassoc'h evit ann nevez-amzer  
Pa glever al lapouset pep lec'h dre ar c'harter ;  
Pa glever d'eus ar mintin darn 'n'he o c'hragachat  
Hag ann darn all o kana , darn all o c'huitellat.

Chetu aze eur skuër gaer , tud yaouank , 'vid omp holl ,  
Pehini velomp bemdez , c'hetan ma pâr ann heol ;  
Ann deiz all , dreist ar re-all , leun a blijadures ,  
Me lez d'ann abarde-noz betec ty va mestres.

Ne oan ket pell d'eus he zy , pa harzes ma fasaou :  
Me a vele daou estik var ar memes bodaou ;  
Plijadur moa d'ho guelet , muioc'h c'hoaz d'ho c'hlevet :  
Pe seurt laouenediguez ! pried ha prieded !

Mes eur pennadik goude me velez ma mestres  
Gant eur galon glac'haret , leun a dristidigues :  
— « Iec'hed mad d'hoc'h , ma mestres , ha joa pa ho kuelan  
» Me gav d'in peuz poan speret pe hent-all oc'h bet clan. »

— « N'on ket bet clan , dén yaouank , poan spered n'am beuz me  
» Nemet red eo dîn senti ouz gourc'hemennou Doue ;  
» Ma zad en deuz laret dîn , dec'h , rog mont da gousket ,  
» Penaoz oa red ho lezel : henoaz vin goulennet.

— « Souezet hon , ma mestres , pa sonjan er pardon ;  
Ann deiz-se ne gredenn ket e senchfe ho kalon. »  
— « Ne laret ket , dén yaouank , 'm'hon sench-dichench ato :  
» Mar piije kavet guelloc'h , vijec'h ket deut en dro.

» Ha breman me meuz kavet eun dèn herves ma c'hoant ;  
» Ouspen ma eo eun dèn brao , ne vank ket d'ahon argant. »  
— « Me ho kleo mad , plac'h yaouank , red eo din o dilezel ;  
» Me garfe bea enn douar , er bed ne vin ket pell.

» Kenavo d'hec'h a laran , kenavo gant glac'har ;  
» Chetu me 'vel eun tad-moualc'h pa ve o klask he bar ;  
» Mes dre he vouez drueuz hac e gomzou tener  
» Hen zo zur d'eus unan-ail , hac he c'havo enberr. »

N'eus ket mui a blijadur e mesk ar yaouanctis :  
Ann tadou hag ar mamou hen difen è pep kiz ;  
Hint dlefe dont da sonjal emant bet 'vel d'omp-ni ,  
Mes ann oad a vir out he , ha n'ellont ket bout-mi.

Mem boa eur galon ken gué hac'ar roz da viz mae ,  
Me gane , 'vel ann estik , er festou noz ha de ,  
Mes chetu on trahisset gant Bacchus , ar Judas ,  
Kement en deus m'a anaveet ne ket vit laret pas.

Mes joa d'imp var ann douar , plijadur er bed ell !  
Kouls eo d'imp-ni beza joauz 'vit n'em dol da vervel ;  
Mar fot d'hoc'h gout ha klevet piou n'eus græt ar zôn men :  
He hano zo Iann Boudik , euz a barres Kerrien.

